



## Houarnañ ar marc'h

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Pal ar c'hoari

Evit houarnañ o c'hezeg, eo ret d'ar c'hoarierien :

- 1 kavout an houarnoù
- 2 lakaat anezho dindan treid ar c'hezeg ar primañ posubl

### Da gaut

8 botez ha div gador

### Penaos prientiñ ar c'hoari

Daou c'hoarier o vont pelloc'h, keit ha ma vo ar re all oc'h azezañ en ur ober ur c'helc'h bras.

Mouchet e vo an daou c'hoarier ha lakaet e-kreiz ar c'helc'h.

Stlabezet e vo an 8 botez a vo an houarnoù ha lakaet 2 gador a vo ar c'hezeg.

Pep c'hoarier `n `eus e varc'h ; neuze div gador disheñvel (al liv ne vo ket a-walc'h peogwir e vezont mouchet) da lavarout a stumm disheñvel pe un dra skoulmet war unan evit diforc'hiñ anezho.

### Mont endro ar c'hoari

Pa vo lavaret dezho ez aio an daou c'hoarier war o c'hrabanoù da gavout ur votez.

Pa o deus kavet unan (unan d'ar muiañ bep tro) e klaskont kavout ur marc'h.

Pa vez kavet e varc'h gant ur c'hoarier e c'hell staliañ e votez dindan un troad eus e gador ha mont kuit da gerc'hat un houarn nevez.

Gallout a ra ar c'hoarier kemer un houarn lakaet dija dindan marc'h ar c'hoarier all nemet ma ne vez ket anezhañ azezet war e gador.

An hini `n `eus kollet a lâr piv a gemero e blas dirak an hini `n `eus gounezet

